

(12, suite)

Ar Sparfel.
Allegori.

Var ton : On dit partout que j'aime.

(13)

Selaouit ur fablennic,
Ha disqit diouti
Bale ato gempennic,
Mar fell deoc'h prosperi.
Queza a rei d'an douar
Pa zaver re iel,
Ha neuze pebez glac'har
Pa quezer pen izel !

An exempl a g'emerân
Es eul lapous doujet ;
Eur Sparfel eo er galvân
Emesq al lapouset :
Ennez a zo, emerân,
Souveren var ar vro ;
Tribut a ranger dezân
O c'hourzaon ar maro.

(14)

Al lapouset diavez
Ne zalc'ont get pel
Na rancont rei o buez
En e c'hrifou quevel ;
Diver nich e zeont gantân,
Evel eus ar voden ;
Tout e c'haparchont ostantân
Qement a zoug pluen.

Un devez, dre eun arouc - chanch,
A eruas ganta,
E lamas en eur groug - laus

Erit commans paca
 Gen alies a vuntrou
 Hag a rapinerez
 En doa dre e zigurjou
 Grêt epad e vuez.

Oll lapouset ar c'hanton
 A oue calz raviset;
 Joa ganto en o c'halon
 Oc'h e velet paqet.
 Conseil a ranger brema
 A lavaront-hi oll;
 Poent eo, oc'h e bunisa,
 Laqat fin en e rol.

(15)

Hep ay distera damant
 Voe neuze condaonet
 Da veza incontinant
 Var ar plas displuet;
 Epad ma chomo pluen
 E rancomp, emezo,
 O chasa eus e groc'hen:
 N'ep gras n'en deveso.

Mar deu pluy neve dezân
 Var evez evezimp,
 Hag adare varnezân
 A nevez e quezimp:
 Displun e ranco mervel,
 Erit hon asurans;
 Red e verzo e derc'hel
 ferm ato d'or setâns.

(16)

E veg hag e ivinou
 A ranger da grenna;
 C'hoas e rafe torfejou
 Ma vent lezet ganta.
 Eur vech ma vezint creunnet,
 Ha ne allo nijal,
 Ne vezimp mui dispennet,
 Caer en defe fringal.

Lezomp gantân e rue,
 Mes miromp ne rai droug;
 Ma vemp eur vech didrue
 E varfe oc'h ar groug.
 Ar vuez zo presius,
 Ne douchomp get outi;
 Miromp na vemp visius
 Gentra ne vang deomp-ni.

(17)

Ar scol-ma a zo deoc'h-u,
 C'houi, sparfelli fier;
 Mes gent ma vego echu,
 Clêvit daou pe dri c'her:
 Hirio ebaz an ear
 E rodal o queler,
 Ha varc'hoas var an douar
 Gant an treit o presser.

(Vol. II, p. 12 - 17.)